

Koad Vincent (Visant Koad) (Montroulez 1845 – Montroulez 1908)
Modernnaet eo bet an doare-skriva.

Bugale Breiz-Izel

War don galleg ar *Marseillaise*

Redom, bugale Breiz-Izel,
Redom buan oll a-vagad,
Ya, redom hirio d'ar vrezel,
Ne glevit ket trouz an argad (*bis*)
An devez a zo 'n em gavet
Ma teu c'hoaz on enebourien,
Hag int stankoh evid merien
'N eur youhal gwalleur d'or haved.
 Kemerom an armou
 A zouge on tadou,
 Da vond (*bis*)
 Oll warneze
 Heb kaoud aon, bugale.

O ! pebez devez eo hemañ !
On enebourien a dosta,
Evel-se bugale, bremañ,
Skoom warne heb marhata (*bis*)
Hirio tennom oll or hleze.
Or breudeur 'zo deuz or gervel.
Oll emaint o vond da vervel,
O vond da vervel, marteze !

On enebourien villiget
En o halon tan an Ivern,
A zeu warnom ken kounnaret
Hag ar marh paour a zah¹ er spern (*bis*)
Ha war-zu amañ pa zeuont,
En eur laza bihan ha braz,
Gream deze kaved o hlaz²,
Pe derhel kuit karget a spont.

Hogen, arabad ez eo skei
Nemed ar re a ra dem³ poan,
Na lazom ken nemed ar bleiz
Rag hennez eo ankou an oan. (*bis*)

¹ a zah : ?

² o hlaz : ?

³ dem : deom.

Hennez 'gleom⁴ dizalbenna⁵,
Evidom ez eo heb truez,
Evel-se 'tro 'pad or buhez
Lakom anezañ da grenn.
Or banniel, bugale Arvor,
A gleom atao da zougen,
Eñ ez eo banniel an enor,
Sellit, evel an erh eo gwenn. *(bis)*
Ha bewech ma vez displeget
An enebourien a weler
'Vel bleun, pa zeu ar gwall-amzer
O plega o fennou mantret.

En keit ha ma 'z om en buhez,
O diskarom heb kaved aon,
Arabad eo kaved truez,
O astennom war ar varvskaoñ. *(bis)*
Sellit Konan Meriadeg,
A zao hirio demeuz e vez
En eur lavared dem ivez :
« Dalit va hleze galloudeg ! »

Demezu e vez e sao Gwesklen
Ha war e gleze e lenner :
« Enor da Vreiz, ha torr e benn
D'az enebour, gwir mahomer ! » *(bis)*
Hag en eru zevel e lavar :
« Redit, redit d'ar vrezel oll,
Ha diskarit an dud diroll
A houzañv, gand poan, an douar ! »

Klevit tud Vreiz, Marzin, Arzur,
Daou zen demeuz an amzer all.-,
O lavared deoh a-dra-zur :
« Tennit, tennit ar gwriziou fall » *(is)*
Ya, o zennit eta buan,
A-raog ma teuio an devez
Ma rankfoh anzaou en diwez
Evid atao, braz ha bihan.

Gwelit an neñvou 'zo tanet,
Al laboused 'chom heb kana,
Hag en douriou 'sao ar raned,
Ne reont ken nemed krena. » *(bis)*

⁴ gleom : dleom

⁵ dizalbenna : ?

Allaz ! oll 'krenom hep paouez,
Gwelit, o fennou a blegont,
Keit ha ma zo tud divergont
O klask atao mouga or mouez.

Klevit, klevit ar hanoliou,
Ne reont ken 'med strakal,
Keit ha ma halv an trompillou,
Deuz an daou du, d'ar hann, re all. *(bis)*
Evel-se dikouezom deze
Ez om-ni bugale da Vreiz,
Ar vro e leh ma kaver feiz,
Doujañs Doue ha karante'.
Diskouezom 'karom or frankiz,
Ha kement tra 'ra vad an den,
Pa'z om, tud koz ha yaouankiz,
En eur ganna war ar blênenn. *(bis)*
Rag int, mar gallfen o lakaad
Da gousked en o liammou⁶.
Bugale, tadou ha mammou,
E chomfem enne da gouskad⁷.

Ya, diskouezom 'ouzm mervel
Evid divenn atao or bro,
Or bro goz anvet Breiz-Izel,
Brezi-Izel, douar an dero. *(bis)*
Evel-se anezi 'karom
En keit ha ma'z om en buhez,
Hi 'zo eur vamm leun a druez,
Hag eviti, ni oll, marvom !

⁶ en o liammou : ?

⁷ gouskad : da gousked (evid ar rim).